




PHOTO JOS LE DOARÉ

Eun ti nevez e Ploumilio

BLEUN-BRUG

Niv. 114 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

HERE 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridoù da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**
Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho
skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Kentel ar Zent , gand L. B.	1
Yod-kerh er presbital , gand Job Séité.....	2
Pèr, ar penn-skañv , gand Mari Herrou.....	7
Heol , gand Yann Gorrigan.....	8
Glao , gand Yann Gorrigan.....	9
Istor ar Bleun-Brug , gand L. Lok.....	10
Teñzor ar Brezoneg beo , gand V. F.....	13
Ar banne alambig , gand Mari Herrou.....	15
Ar plah goulennet da zimezi , gand Yeun ar Gow.....	17

*E dibenn miz Here e vo embannet
danvez Kenstrivadegou-Skol ar Bleun-Brug*

Le Gérant : **Abbé BLEUNVEN**, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMPR. CORNOUAILLAISE — C.P.P.P. N° 21697



133863

KENTEL AR ZENT

Eet eo adarre an hañv pell diouzom...

Ma 'z eo digoret ar skoliou evid ar vugale, ar yaouankizou... evid ar re vraz, ar re o-deus eur garg bennag, evid ar re a rank gounid o bara, al labour, a zo ive o kregi a-nevez, pe gentoh, o kenderhel, gand ar gwel dirazom euz eur goañv hir da dremen...

Goueliou Kel-ar-goañv, ar miziou Du, o tostaad, a ro deom da zantoud pounnerroù lezenn striz al labour, stad pinijennuz buhez ar bed-mañ. Ha koulskoude, pa zoñjer mad, el labour, er stourm, eo ema ar blijadur, ar vuhez ; ha nann en diskuiz, en êzant, en treh... Hag eo marteze evid sanko dounnoh ar wirionez-se en or sperejou eo e teu an Iliz, beb bloaz d'ar mare-mañ, da lakaad dirazom ar zoñj beo euz an dud kaloneg o-deus meritet kaoud an oan dispar a Zent.

Ar Zent a vezim galvet heb dale da enori, petra int bet ? Tudigou dister evel dom, med tudigou hag o-deus gouezet harpa, ha diazeza o zempladurez war nerz hag oll-halloud Doue.

Eun deiz, a daoulagad a zo digoret d'ar gwir sklerijenn, gwelet o-deus sklêr, diouz ar sklerijenn-ze, ar pezh e-noa pouez, ha talvoudegezh gwirion. Diwar neuze o-deus greet o dibab a-grenn, ha n'int mui deuet war o hiz. Komprenet o-deus ez oa madou talvoudusoc'h ha padusoc'h eged madou ar bed-mañ da glask ha da hounid... Eet int a-benn gand o ero... Ar pezh zo kirieg, deom da gaoud ken aliez a geuz, a gerse, a hwervoni, eo dre ma stagom re stard or halon ouz traou an douar, dre ma hortozom diganto ar pezh n'int ket gouest da rei deom.

Ar Zent, o veza m'o-doa lakêr o esperañs, a harantez uhelloc'h eged ar bed-mañ, a jome seder ha laouen er baourentez, er boan, en dic'hañs. Ne labourent ket war ar memez torchenn ganeom-ni, hag a 'fell deom atao dastum hag eosti... hag a zo prest da vond en egar, da 'fallgaloni, pa n'ez a ket an traou hervez or hoant...

Ar zoñjou-ze a ruilhe em spered, en deizioù tremenet, o lenn ar pezh a zo bet skrivet diwar-benn **Charles de Foucauld**, ar peher-ze distroet a-grenn ouz Doue, ha deuet da veza ermit, abostol ha merzer ar Sahara : « Kerkent, emezañ, ha m'em-eus anavezet ez oa eun Doue, em-eus komprenet na heller ober netra all, nemed beva evitañ... » Lavarred a ree c'hoaz : « P'en em lakaer en hent gand ar zoñj ober eun dra bennag, ne dleer ket dond en-dro, araog beza kaset an era da benn. »

Pebeg den ! Beva evid Doue hebken, oh en em ober heñvel ouz e Zalver, kas e ero da benn o tigemer ar maro a-berz ar re n'e-noa greet nemed vad dezo, setu ar pezh e-neus greet. Eñ hag a jome debret e spered, trubuilhet e galon e-kreiz ebatou ar bed, a skrivo diwezatah : oa euruz, euruz, o vev er baourentez, e-kreiz tud paour hag hanter hovez, o teski o yez, o chom euriou hag euriou da gomz outo, o klask evel-se an hent sura da gaoud dor zigor en o halon. Pebeg kentel !

Dirag daoulagad an dud, oa foll, n'e-noa greet nemed koll e amzer. Hadet e-noa el labour, er boan. Hirio, war al labour hag ar boan-ze, ez eus eun eost puilh o sevel.

L. B.

Yod-kerh ar presbital

gand Job Séité

— Ata, Marijann, penaoz ema kount ganeoh er mintin-mañ ?
— Fall kenañ, aotrou Person ; biskoaz em-bije kredet e vefe ken fall an dud, hirio !

Marijann a oa plah er presbital abaoe pell a oa. Labourérez dishenvel, ne jome morse da zelloud. Kempenn an ti, ober ar boued, digemeret an dud a zeue da glask ar veleien, setu penaoz e tremene he amzer, euz ar mintin beteg an noz.

Ginidig diwar ar miz, oa neubeud a arwechou ganti. Etre an aotrou person hag hi ne veze nemed brezoneg. Awechou koulskoude e klaske distripa eul lastez galleg, hanter-vrezoneg, pa zeue en ti, tud a ne anaveze ket.

Marijann a oa chomet eur vaouez a hiz koz, daoust ma oa o servicha er presbitaliou abaoe pell a oa. Anad oa he-doa tremenet he yaouankiz war ar miz etre ar parkeier hag ar 'ferm, etouez an anevaled.

Evid he aotrou person ez aje en tan, daoust ma kleve beb an amzer he 'fater digand hemañ, pa ne 'z ee ket dirouvenn a-walh an traou, pe hoaz pa gawe e tispigne re evid ar boued.

An aotrou person, eul mell den, askournet groz, dezañ malvennou teo hag hir, a leze ar stur euz e bresbital gand e blah. Houmañ a gomande en diabarz, mestrez dreist-oll war ar geusturenn, a jome a hiz koz evel di.

Aliez bremañ e hrosmole. Diêz oa kaoud ar pezh a oa ezomm. Peb tra, koulz lavared, a oa diank, ar 'hig, ar bara, ar sukr a veze tailhet. Gand tikeji e teue a penn da gaoud eun draig bennag, med pebez torr-penn. Biken n'he dije kredet e vije deuet eun amzer ken kriz-ze war ar vro, dreist-oll war Vreiz-Izel. Ar pezh a oa kaoz : ar brezel.

Ar brezel avad a gendallhe atao... abaoe 1939. Edod bremañ e 1943. An Almantet a zune ar vro gwasoh-gwaso. Ano 'bed dezo atao da vond kuit. Er hontrol eo, deuet oant da gemeret gwrizioù menez betek er presbital. Ar pezh a lakee Marijann da feulzi, dreist-oll pa gleve anezho o tiskenn pe o sevel d'ar halloup ruz skalierou he zi, gand o bouter tachou.

Pa veze poent terki lein, ar paour kêz plah a en em houlenne petra da ober ; rag ousspenn an aotrou person he-doa da veva ; daou gure yaouank a ao ive hag ar re-mañ n'hellent ket beva gand er an amzer. Figusoh eged o mestr, an daou-mañ a hinc aliez dirag keusturenn Marijann. Houmañ he-doa kavet, a forz da zoñjal ha da glask, eur gundu disheñvel, êz da boaza, founnuz da lounka....

Mad, er mintinvez-se, ar paourkêz plah oa evel semplet dirag he 'ferson.

— Sellit 'ta, emezi, petra 'm-eus bet. Eul lizer digand ar prefed.

Hag e tiskoueze eul lizer.

— Eul lizer digand ar prefed ! oh huñvreal emao !

— Oh huñvreal ! lennit hag e weloh ! Pebez amzer !

An aotrou person a gemeras al lizer a astenne warzug ennañ Marijann.

Epad m'edo o lenn, hi a jome sioul, he daoulagad o para gwech war al lizer, gwech war dremm ar person. Hemañ avad a jefichas liou...

— Ahanta ! eme ar plah, gevier a lavaren !

Chom a reas mud, eur pennad mad, e zaoulagad atao o para war al lizer. Trei ha distrei a reas an tamm paper, meur a dro, eur bern soñjou o rodella en e spered. Erfin e lavaras.

— Diskuliet (1) oun bet ! pebez bro zaonet !

Marijann ne lavare ket a heier. Al lizer a deue aberz ar prefed ! Setu amañ ar pezh a oa warnañ.

(1) Diskuliet = denoñset.

PRÉFECTURE DU FINISTÈRE

3° Division - 7° Bureau

Service du Ravitaillement

—o—

MADemoisELLE,

Monsieur le Préfet du Finistère

à

Mademoiselle Marie-Jeanne.....
gouvernante au presbytère de.....

J'ai l'honneur de vous faire savoir que, étant donné les événements tragiques que nous traversons, la pénurie de céréales dont nous souffrons, l'avoine sera strictement réservée désormais au train des équipages. Dorénavant l'usage de la bouillie d'avoine ne sera autorisé qu'un jour par semaine. Tout contrevenant à cette décision sera passible d'une amende de 3.000 francs et en cas de récidive d'une peine de prison de trois mois à six mois.

Veuillez agréer, Mademoiselle.....

Skrivet gand ar mekanik, al lizer a oa warnañ kachedou ar prefektur.

Ankounac'haet em-eus lavared deoh e veze grêt yod kerh aliez er presbital. An aotrou person a gawe mad yod-kerh. Ar gureed avad neubeutoh. D'ar gwener, evid koan, Marijann a ree eur mellad podad, awalh evid deg. He 'flijadur a oa lakaad tro er vaz-yod, en abardaez-ze. Ar pezh a jome, goude ar pred, a veze fritet d'ar zadorn da noz, ar restachou sadorn a veze fritet evid ar zul da noz. Fritet ha difritet, ar memez podad-yod a helle mond beteg ar merher. Avañs labour, avañs boued, gounid amzer.

Ma kave mad an aotrou person yod kerh, n'heller ket lavared an hevelezh tra euz ar gureed. Ar re-mañ a jom aliez da ourzal dirag o 'flad goull, gand aon, kredabl braz, da drei e yod.

En e vleud, e veze neuze an aotrou person, dirag e blad, leun bourr a yod.

Kaer o-deze ar gureed sinkanad o 'ferson war ar gundu, hemañ a responte atao ar memez tra :

— Yod-kerh ! med petra zo gwelloc'h ! N'eus netra kreñvoh ha nerzusoh.

Yod-kerh a blije d'an aotrou person ha yod kerh a ranke ar gureed debri ive, petramant chom heb tamm. Kundu ar presbital a oa enni ousspenn traou disheñvel d'ar mar-ze. Beb an amzer e veze melhod-krogeneg. Pa veze deuet ar poent, an aotrou person a ree tro e jardin, eur orjalenn goz ha merglet en e zorn. Kement toull a oa er mogerioù a veze furchet, brochet. Ar paourkêz melhod a veze goudeze rostet war billig Marijann.

Da zigeri kalon, petra zo gwelloc'h !

D'ar gwener, e vezent digaset war an daol araog ar yod. Pephini a gemere eur spilhenn evid chacha ar velhodenn euz he zoull. Trouz ebed ouz an daol. Chacha, suna, lipa an druzuneged en-dro d'ar grogenn, setu ar pezh a oa da ober.

Ha goude, beh d'ar yod-kerh ! na petra-ta !

An aotrou person a lounke e yod, a lounke da heul eur mellad bolennad lèz. Med kaer he-deze Marijann lakaad amann rouzet war he yod, n'oa ket avañsetoh ! ar gureed a jome atao ker figuz. Aze edo an dalh !...

— Diskuliet oun bet ! a lavare an aotrou person d'e blah, en eur vond, en eur zond, e kegin e bresbital.

— Piau, gav deoh, e-neus diskuliet ahanom ?

— Piau ? an dud a zo deuet da veza ken fall bremañ ! ne gavan ket drol, a lavaras Marijann.

— Koulskoude, ped gwech em-eus lavaret er gador nonpas diskulia.

Hag e chome da zoñjal.

— Ar miliner eo, sur oun. N'eus nemetañ o houzaud e vez implijet bleud kerh amañ. Feiz, hennez a glevo e jeu hag e bater ganen.

Er mintinvez-ze, an aotrou person n'hellas ket chom a blas. Mond ha dond a reas, diskenn ha sevel ar skalierou, evel eul labour en e gaoued. Beb an amzer e tenne al lizer euz e hodell.

Diskuliet oun bet ! gand piau ?

Marijann, epad an amzer-ze, a zorohe he-unan penn er gegin.

— Mantruz eo soñjal en amzer zo deuet warnom, emezi ! Eun druez eo. Abenn ar fin ne vezim ket ken mestr en oa ti. Lamponed brein zo anezo, kanailhez !

Ma kav dezo e rint ar pezh a garint neuze ! Gwelet e vo !

Hag ez ee hag e teue euz eur penn d'egile, eun imor enni evel he mestr.

— War an teil e kasint ahanon, aotrou person. Tri mil lur amand, ar prizon marteze. Fidandoue, setu aze buheziou avad !

— Marijann, deuit amañ. Me barife eo c'hwi a zo bet oh ingala dre ar barrez e veze grêt yod kerh amañ, diodez a zo ahanoh !

— Aotrou person, o nann. Daoust hag an dra-ze a zelle outo.

— Piou neuze 'ta ?

— Mad ! serri ho kenou bremañ. Arabad deoh mond da inkanti ho-peus bet eul lizer digand ar prefed.

N'heller ket chom atao da zoñjal. Heb lavared ger, prim goude, an aotrou person a gemeras e dok hag er mêz euz ar presbital, izel e benn.

Da gaoud piou mond evid goulenn kuzul, da glask an hini e-noa e ziskuliet ?

Treuzi a reas an hent bras. Ar hereour a oa dirag e brenest, o tarhei war e vouteier.

Hemañ marteze, a zoñjas dioustu an ao. person, a hellfe va lakaad war an tres.

— Ha neuze, Fañch, emezañ, en eur vont en nor, penaoz ema ar vuhez ganez ?

— Mad tre, aotrou person, ha ganeoh c'hwi ?

— Pebez amzer daonet ha milliget ! ne gav ket dit Fañch.

— Amzer daonet, ao. person, gwir a lavarit ! Ar boched warnom atao ! Berrentez boued ! Lamponed ar marhad du ! eun drubuilh eo.

— N'eo ket gand an dra-ze oun darbare. Traou all a zo, a zo gwasoh.

— Petra zo nevez 'ta aotrou person ? ho yehed ne da ket ? N'emaoh ket 'ta war ho tu ? An Almanted marteze o-deus taolet ahanoh er mêz euz ho presbital ?

— Netra euz an dra-ze, Fañch. Diskuliet oun bet.

— Diskuliet, aotrou person ! C'hwi ive a ra « parti » euz paotred ar brouskoad, euz ar resistañs.

— Paotred ar brouskoad ! Paotred ar brouskoad, koad petra ? N'emaout ket tamm ebed er gount. Hag e heje e benn, hag e teue hag ez ee dirag ar hereour.

— Ya, diskuliet oun bet ! Ne weles ket gand piou ?

— Diskuliet, diwar-benn petra, aotrou person ?

— Diwar-benn yod-kerh, Fañch. Selaou-ta. Marijann he-deus bet eul lizer digand ar prefed, evid mired outi d'ober yod-kerh. Piou, 'gav dit, a zo bet o flata anezi ?

Pa welas ne gomprens ket re ar hereour ar pezh a oa e kaoz, e kountas penn da benn an darvoud a oa c'hoarvezet er presbital, e tisplegas dirazañ al lizer...

— Ne gav ket dit, Fañch, e vefe gwelloc'h d'ar prefed lakaad urz e traou all eleh lakaad e fri er presbitaliou. Eur vez eo gweled kement-se !

— Ya 'vad, aotrou person, ar pezh a lavarit a zo gwir. Ma kendalh an traou da vond er giz-ze emaoim e riskl da veza mouget gand al lorgnez a zo o komandi ahanom.

Sioul e chomjont neuze o daou, eur pennad mad.

— Ar miliner eo !

— Marteze avad.

— Ne welan nemetañ hag a ouezfe e veze grêt yod kerh er presbital. Te a ouie, e veze grêt ?

— Ne ouien ket avad, aotrou person. Eur wechig bennag koulskoude em-eus bet klevet ar gureed o kounta ano euz yod kerh ar presbital...

— Ouspenn, ped gwech ez-peus va hlevet er gador o lavared non pas diskulia. Ya ped gwech !

Izel e benn, gwall rouvennet e dal, e lavaras kenavo da Fañch hag ez eas pelloc'h da gounta d'eun all istor ar presbital, da esa gouzoud piou al lampon brein e-noa flatet e blah.

Epad an amzer-ze, Marijann ne jomas ket da hinaouegi dirag mogeriou ar presbital, pell ahano.

En eur garnachad dirag kement tra a gave war he hent, e teue hag ez ee, e skube an ti, ar zal, ar skalierou. Beb an amzer e teue d'ar gegin, e chome a-zav en eur houg anezi, e tizoloe ar pod yod-kerh, eleh m'oa hoaz eur gwiskad mad a yod. E-kichen, en e zav ouz mantell ar siminal, eun drinkenn, ar penn, pounner awalh da ober eur mailh, e-nije torret e benn ouz n'eus forz peseurt aneval.

Chom a reas eur pennad da zoñjal. Goude-ze e krogas e diousskouarn ar pod, ennañ hoaz, awalh a yod evid tri dervez. Dre an nor-borz ez eas war-eün er jardin beteg ar bern teil ha war hemañ e houlonderas ar rest euz ar yod.

— Evid bremañ, emezi, ar prefed n'e-no netra da lavared.

— Oh ober petra emaoim aze, Marijann, eme unan euz ar gureed, degouezet er jardin.

War an taol, Marijann a droas he 'fenn hag a dennas he daoulagad diwar ar bern-yod-kerh.

— Oh ober petra ! eun druez eo. Ha gand petra helloh beza bevet bremañ, me en em houlenn !

Gand he 'fod goull, e teuas d'an ti, an doriou a strakas war he lerh, ar 'hastolorennou a oe klevet o tirlinkad. Amzer gaër a bromete d'ar prefed, ma kousesfe dindan he skilfou.

— An dra-ze n'eo ket traou da ober eo ! mired ouz plah ar presbital d'ober yod-kerh !

Da hedat ar poent da lakaad lein war an tan, e kemeras eur beh dilhad evid mond d'ar poull. Al lun a oa anezi hag ar houez a oa da ober.

Endro d'ar poull walhi, e kavas ar merhed a gave beb lun. Amañ e lavige estreged an douarn hag an dour. D'al lun dreist oll e veze keleier nevez n'eus forz pegement ; e veze ive displuet e benn da veur a hini. Epad ma tarhaoue ar holvez war an dilhad, epad ma fritilhe ar re-mañ en dour, e lavige an teodou heb ehan.

— N'o-peus ket klevet an dra-mañ. Ha peb hini a zizahe ar pezh a ouie. An diskouarn a veze astennet. Prop ha kempenn unan bennag a veze siret dezañ e voutou war ar marhad. Kemend marvailh dinodet er barrez a gemere amañ lañs a-nevez. An oll boullou a zo heñvel e peb leh.

Pa zigouezas Marijann er poull e oa kaoz evel kustum. Ano oa dreistoll euz ar marhad du, euz ar hafe hag ar sukr a veze kavet neubeud anezo, euz ar hig gann ha treut a veze roet evid tikeji, euz ar re a zebre bara gwenn, euz ar re a gave an tu da gaoud bleud en eur vond en noz d'ar vilin.

— Ahanta, Marijann, emaoim degouezet, a lavaras Anna-Von, pa welas houmañ plah ar presbital o taoler he beh dilhad d'an traou. Hirio emaoim diwezatah. Labour a jome-ta abaoe deh !

Houmañ, kuriuz evel eur gaerell, a esee atao gouzoud araog ar re all piou a oa tremenet dre ar presbital, en derhent hag e wilche warzug Marijann da hedat he respont.

Marijann avad ne lavaras ger, a buchas en he hased-walhi, evel droug enni.

Gand eun taol lagad, Lizig a welas dioustu n'edo ket Marijann en he hoch, hag e oa eun dra bennag o waska anezi.

— Ne da ket 'ta dirouvenn an traou, Marijann ! Tregas ho-peus, war a welan. Ar gisti Almanted marteze a zo bet oh ober reuz er presbital ?

— Labour vije neuze ma vefe red ober van ouz an amprevaned gwer-ze, emezi. Gwasoh zo en em gavet ganen. Eul lizer am-eus bet digand ar prefed.

— Eul lizer digand ar prefed, evelato ! Petra 'ta zo a-nevez er presbital ? Eul lizer evidoh c'hwi ?

— Ya, ya, ken gwir hag emaoim amañ.

Oll verhed ar poull a zave bremañ o fenn da zelled ouz Marijann.

— N'eo ket posubl, eul lizer hag evid petra ?

— Diskuliet oun bet.

— A !

— Ya, unan bennag a zo bet o flata ahanon, e reen re aliez yod-kerh.

— Petra diaoull ! ar prefed a fourr e fri bremañ er yod-kerh ive.

Ha Marijann da gounta ar pezh a oa c'hoarvezet ganti. Diou, teir gwech e tribunas he istor penn da benn, en eur boueza dreistoll war an tri mil lur amand, ar prizon...

— Mantruz eo, eme Chaned, mond da glask afer ouz piou, pa 'z eus kement a lorgnez hag a lampouned e vefe red dihasti, kement a flaou-chened a vefe ken mad all o huala !

Euz ar poull d'ar bourg n'oa ket pell. Eun hanter eur goude, edo ar helou o reded dre ar bourg a-bez.

Lizig, eet da gas he dilhad d'ar gêr da virvi, a gountas an istor da gement-hini a zigouezas ganti.

— N'ho-peus ket klevet ar pezh a zo c'hoarvezet gand plah ar presbital ?

Houmañ a gonte d'eben, eben a gounte d'eun all. Troet ha distroet, kountet ha digountet, istor ar presbital a oa en em ledet ken buhan hag eun tenn kurun. Deuet oa da veza ken luier en eur vond euz ginou an eil d'eben ma oa ennañ, ano euz ar prefed, euz an archerien, euz an Almanted... euz eur bern traou kemmesket evel ar yod-kerh a oa a zindan.

Epad an amzer-ze, an aotrou Person a gendalhe gand e droiad, a gounte e pleg' o skouarn d'e gamaraded koz afer e blah, o klask divinoud piou al lanfre e-noa diskuliet anezañ.

An diweza e -noa gwelet a zirollas da hoarzin pa echuas an aotr. Person e istor.

— Med, aotrou Person, ne gav ket deoh ez eus aze eun taol farsèrèz ! Me barife forz pegement.

— Hein !

War an taol, e komprenas dioustu. Satorditah ! penaoz oa chomet keid-se heb divinoud an dra-ze ? Hag e lavaras :

— Gwir a lavares. Farsèrèz eo.

Paourkêz aotrou Person, re ziwezad...

Edo o tiskenn warzug e bresbital, err warnañ, gwall chouchet e benn, pa zigouezas gantañ Marianna.

— Petra, aotrou Person, eme houmañ dioustu, gwir eo eta ar pezh he-deus kountet d'eom bremañ Marijann. Eul lizer he-deus bet digand ar prefed evid mired outi d'ober yod-kerh.

— Hein ! eul lizer petra ! ar prefed ! Ranellèrèz !

Heb chom hirroh da gêzeal, ez eas kuit. P'edo dirag dor e bresbital, Jannig, a oa o tond gand eur garrigellad dilhad, n'hellas ket mond ebiou dezañ heb ober outañ ar memez goulenn. Eun tamm heja a reas d'e ziouskoaz ha kuit heb lavared ger.

An nor borz a stlakas war e lerb hag araog sevel war dreuzou an ti, e chomas eur pennad mad da zoñjal... Mare lein a deuas hag edont o zri en dro d'an daol o vond da staga gand ar zoubenn.

Goude ar « Benedicite », an aotrou Person, rust ha rog, a halvas e blah. Marijann a deuas er zal.

— C'hwil zo bet o tefi istor ar yod-kerh er bourg. Sodenn goz a zo ahanoh ! Bremañ ema an oll o hoarzin diwar or penn. Ezomm ho-poa da gounta an dra-ze, sur !

Piou e-noa greet an taol-farsèrèz-ze ? diêz a-walh oa her gouzoud. Ar pezh a ouzan : meur a hini a oa bet an aotrou Person o welet anezo, n'oa ket direbech, pell euz eno. Ken aliez o-doa klevet ar gureed o klemm diwar yod-kerh ar presbital, fritet ha difritet gand Marijann, m'o-doa bet eun tammig truez outo.

Diwar neuze, Marijann a lezas e yod-kerh a-gostez, nemed da wener.

Pèr, ar penn - skanv

Pèr er yaouvez-se e-noa laket e zonj da vond d'ar vourh. Ezomm e-noa da brena aotenn ha Marianañ, e vaouez, he-doa karget anezañ d'ober meur a gefridi.

Hag ar paotr o kerzed laouen war-zug ar vourch war-droad ! Erruet war ar blasenn, ha buan e ti ar perrukenner, en ti nevez kement ha mond. Yann e vreur-kaer, e-noa bet ahano eun aotenn vad. Pèr a c'houlennas e varhadourez ha goude beza sellet piz outi, e paeas hag er-mêz ! Ober a reas kefridi Marianañ mez en em gavoud a reas gand Fanch an ti-all.

Mad eo kaozeal eun tammig ha Fanch e-neus atao kalz traou da gonta. Eun den mad eo ivez da renta servich. Pegwir e-neus eur harr-dre-dan, Pèr, a zo sur da vond d'ar gêr gantañ.

— Deus-ta, eme Fanch, ganin d'an ostaleri-mañ. Da houde ni a rantreo dioustu... Mez sammet out, Pèr ! Sell ! Va « Deux chevaux » zo aze. Laosk-ta da baner enni.

— Ya vad, eme Bèr... ne vin ket pell, kerz atao !

Hag ar paotr d'ar réd war-zug ar blasenn, gweled eno eun « 2 chevaux » ha lezel enni e zamm.

— Sed' amañ 'vad, emezañ, eun dro-gaer ! Marianañ he-do he hig araog kreisteiz.

P'o-doa on daou baotr evet o banne gwin, buan endro war-zug ar blasenn, en eur lipad o mourrou.

Kaoz braz a oa ganto. Koulskoude Pèr a welas buan e « 2 chevaux » eet kuit ha Fanch o kerzed war-zug eun-all e-kichen an iliz.

— Asa-ta ! Fanch, emezañ, Petra ? Petra ? Hounez eo da « 2 chevaux » ! Petra 'm-eus me greet ? Fanch kêz ! Me zo faziet bremañ en eur...

— Makaz tamm paotr fin ! eme Fanch... Peleh redeg war he lerb bremañ ? N'on-eus ket memez an numero !

— Ho ! Va aotenn nevez, a zoñje Pèr — hag en em lakeas da redeg ha da glask tro war dro d'an iliz.

M'az-pefe gwelet anezo o daou ! unan o paka krog en oll otoiou « 2 CV », eun-all o redeg hag o konta da forz piou pezh a oa c'hoarvezet gantañ. An dud a vouse'hoarze, lod a ree an neuz da glask gantañ. E ti ar perrukenner, er voulonjèrèz, er gigerèz, e-leh ma oa bet, ez eas, ar paourkez den hag e koute e istor. Piou er mintinyez-se ne-neus ket klevet komz diwar-benn eun aotenn, eun « 2 CV » hag eun den penn-skañv ?

En ti-kêr ez eas Pèr. Mez da 'oa dezañ a-benn ar fin rantreal heb e gig, e aotenn hag e baner. Beteg an noz e oa klañv gand ar zoñj-se ! Eun deveziad mad e-noa greet, sur eo !

Ha piou e-pad an amzer-se, a oa souezet, me 'lavar deoh en eur erruoud er gêr, o kaoud kemend-all en e garr-dre-dan ?

Eur micherour euz a Vrest, deuet en devez-se da labourad e Pl...

Pellgomz a reas dioustu d'ar volonjerezh leh ma oa bet o labourad ha rentet e oa antronoz d'e berhenn e deñzor.

Mil bennoz d'ar micherour evid kement-se ha dreist-oll mil bennoz da Bèr e-neus greet deom-oll c'hoarzin eun tammig gand e fazi.

Mari Herrou.

HEOL

Dihunet oun bet
gand kan ar hog !
Petra zo nevez
gand al loen-ze
pa vouth ken abred e zervez ?

Ha !... Ya !...
An heol a zo savet !...
An Heol !...

Pa bar an heol
a vez laouen an dud,
al laboused a gan,
al loened a gerz seder,
an natur zoken
a ziskouez he levenez !...

Ar geot,
An deliou
a zeblant beza glasoh,
ar bleuniou kaerroh,
an dour sklérroh,
an oabl skedusoh !...

Ha me ?... Me a vez
evel eun all em 'flas...

Perag ?
N'ouzoun ket...
Eo : her gouzoud a ran !
Med penaoz rei deoh da gompren
e vezan cheñchet
gand an heol o para ?...

Gand plijadur, e stagan
da gana,
da c'hoarzin,
da c'hwitellad...

Pa bar an heol
e kavan kaer peb tra,
skañv peb labour...

Perag ?
Ablamour ma par an heol !...
Ablamour ive, marteze,
m'eo esoh,
pa bar an heol
sevel an daoulagad
war-zu an Neñv ma verv ennañ
steredenn an deiz...

Neuze va zell a ya pelloh...
Pelloh eged an oabl,
pelloh eged an heol...

Beteg an Neñv ma chom ennañ
an Hini e-neus enaouet
ar Goulou-Meur
a sklerijenn ar bed
abaoe m'eo bet krouet...

Neuze e sav euz va halon
eur meulgan
evid krouer an heol.

Yann Gorrigan.
(Eost 1958.)

GLAO

Derveziou ha derveziou zo
ar glao a gouez
heb ehan,
heb distag...

Eun amzer drist,
eun amzer diwar skwer ar bed,
rag ar bed ive zo trist...

Daoust ha bez 'z eus bet
eun dervez,
eun dervez nemedken,
abaoe pell zo
heb gwad ha daelou skuilhet ?

Heñvel ouz an dour-glao
a red
heb ehan,
heb distag...

Ken trist ive,
tristoh zoken, marteze !...
Gwad ha daelou zo heb priz...

Daoust peur e savo ar hounmoul
a garg an oabl
a-uz d'or penn ?

Derveziou ha derveziou zo
ar glao a gouez
heb ehan,
heb distag...

Peb toull zo eul lenn,
peb roli eur houer,
peb gouer eur ster,
peb ster eur mor
a zour melen ha louz...

Ma ne dav ket ar gasoni
kentoh eged ar glao,
e vo dienez,
dre ziouer tud
da labourad...

Neuze avad, e hello
ar glao ehana,
an heol para,
pa ne vo mui dén barreg,
pa ne vo mui nemed
tud hanter-ziwaded,
kalonou drastet,
daoulagad dizêhet...

Med, marteze, om kaoz...
Goulennit hag e vo roet deoh,
eme an Aotrou...

Daoust ha seveni ray or goulenn
ma ne zentom ket outañ ?
Eñ eo ar Mestr...

Ar Mestr mad
ha just,
a ro da beb hini
hervez e viritou...

Ar Mestr ha neus nemetañ
gouest da rei deom,
pa gar,
heol tomm
ha glao klouar.

Yann Gorrigan.
(Gouere 1958.)



ISTOR AR BLEUN-BRUG

(kendalh)

Digorit *Feiz ha Breiz* 1910, p. 222, evid gouzoud petra 'tlee beza konkouriou ar han er bloaz-se. An dro genta oa da strolladou kanerien ha strolladou kanerezed — disparti avad — ha da ganerien pe ganerezed — peb hini en e bart e-unan — da gemered perz er honkour, digoret evid Bro-Leon hebken.

Ar gouel a oe kaerroh eged er bloaveziou all, rag an amzer a oa bet a-du gand ar Bleun-Brug.

Savet oa bet eur patronaj e Kergrist, gand an Aotrou Perrot, evid Sant-Nougaiz. En-dro dezañ eun teatr dister a oa bet greet gand pleñch ha liñseriou gwenn.

Boulhet oa bet ar gouel gand eur brezegenn war emgleoioù an tadou a familh ; ar prezeger, dispar anezañ, oa an Aotrou Madec hag a vezo diwezatoù, hervez m'eo bet kontet amañ gand an Aotrou Cornic (Bleun-Brug Landivizio), gwelet o klask sturia ar Bleun-Brug.

Konkour ar pennad skrid brezoneg a oa bet barnet en doare-mañ : « Poaniet 'zo bet kenañ gand ar pennad skrid brezoneg ha deut eo braoig gand unan bennag. E kement-se eo red anzav n'eo ket boaz ar vugale da skriva en o yez. N'eus ortograf, koulz lavared, er skridou digaset. Muioh mui e welan e ve tremen mall deom kaoud, er Finister, eun ortograf, ar memez hini evid an oll. Ha peur e c'hoarvezo kement-se ? »

Arabad klask war *Feiz ha Breiz* ar pezh a dremenno goud kreisteiz. Chomet eo bet mud ar gelaouenn.

1911. Seizved gouel ar Bleun-Brug.

Dalhet e vo d'ar 14 a viz Gwengolo e Sant-Nouga.

« Darempredet e vezo er bloaz-mañ evel ma n'eo ket bet biskoaz, n'eo ket ebken gand Leoniz, met gand Kernevez ha Tregeriz ».

Ar gouel a oe digoret gand eun overn, hag a echuas gand bennoz ar Zakramant meulet ra vezo. « Da ziv eur ar bobl a en em zastumas dirag an teatr savet er meaz, herminigou Breiz ha tri liou Bro-C'hall o ficher warnezañ. »

C'hoariet e oe « An Divroet ». Klevet e oe lazou-kana Sant-Loeiz Breiz, Kastell-Paol, ha Landivizio. Pevarzeg laz-kana a zeuas, en o zouez unan a Vro-Gerne hag unan a Vro-Dreger. Botrel hag e wreg a hoarias « Doric ha Lena ».

Feiz ha Breiz a ro da anaoud e oe diêz d'an dud klevet an abadennou, abalamour d'an avel.

Bleun-Brug ha Keryann.

Kaoz a oa gand an dud abaoe eur pennad, edo maner Keryann da veza prenet gand ar houarnamant. An Ao. Perrot a oe lakêt nehet. Muioh mui a dud a deue da oueliou ar Bleun-Brug, e deatr a veze da zevel beb bloaz, gwall zister oa. Soñjal a reas prena bali ar maner, ha lakaad sevel eno eun teatr braz, evel hini Santez Anna Wened ha kaoud eun doare Oberamergau.

Prenet e oe Keryann gand ar houarnamant. Divizet e oe war ar brenadenn-ez e kambr an Deputeed d'an 30 a viz Meurzh 1911.

Ha setu petra lavaras an Aotrou Markiz an Estourbeillon, kannad, hervez *Feiz ha Breiz* (Even 1911, p. 84) :

« Comme député breton et comme président de l'Union Régionaliste Bretonne, la grande association décentralisatrice qui a pris l'initiative et a été la fondatrice à Saint-Vougay de cette fête des fleurs de bruyère (Gouel ar Bleun-Brug) dont a parlé M. de Mun à propos du congrès qui eut lieu à Saint-

Pol-de-Léon, il y a quatre ou cinq ans, je tiens à m'associer aux paroles si justes et si patriotiques de M. Even et de M. de Mun. (Me eo a laka al lizerennou italeg).

N'eo ket bet dislavaret ar gerioù-ze gand an aotrou Perrot, ha zoken, kalz diwezatoù, e 1942, pa eo enoret an aotrou'n Estourbeillon, Y.-V. Perrot a reas meneg euz ar Bleun-Brug, merh an U.R.B. » (*Feiz ha Breiz*, 1942, p. 216-222).

Peseurt kentel tenna diouz an testenioù istorel-ze ? Ar verh a zo ganet e 1905, an dervez ma eo, evid an dro genta, ingalet bleunioù brug e Sant-Nouga hag e Bro-Leon, ha n'eo ket bet gourvadezet nemed bloaz war-lerh, e 1906, ha badezet grand brall ar hleier e 1907, evel m'eo bet skrivet amañ nebeud mizioù a zo.

Ouspenn-ze n'e-neus ket an U.R.B. kendalhet gand ar hiz e neb leh all.

Ar Bleun-Brug, eñ, ne hellje ober netra heb diêzant ma ne vije ket diazezet hervez al lezenn. Ha neuze ar houarnamant, perhenn ar maner, a oa ruz he liou, hag ar Bleun-Brug a veze, hervez an oll, liou ar gredenn gantañ. Ar re Ruz a zoñje sevel « Les Amis de Kerjean » en-dro d'ar Mirdi a vije renket er maner ha marteze ober eun dra bennag.

Diouz e du ar Bleun-Brug a zoñje prena ar vali ha sevel eun teatr brezoneg. Evid-se e oa red d'ar Bleun-Brug beza eur gevredigez hervez al lezenn. D'ar 25 a viz Meurzh 1912, renket e oe Reolennou ar Bleun-Brug, ha diazezet da vad. Er « Journal Officiel » (12 Octobre 1912) e lenner kement-mañ :

« 30 Août 1912. Association du Bleun-Brug de Kerjean. Objet : Encourager les manifestations de la vie bretonne en littérature, art, économie sociale. Siège : Manoir de Kermenguy en Cléder, Finistère. »

Ar reolennou a lavare :

« Il est placé sous la haute direction de l'évêque du diocèse et sous le patronage de certaines personnalités particulièrement connues pour leur attachement au pays breton. »

Ar rener meur oa an Aotrou Kont a Gervengi.

Er bloavezh-se, 1912, ar gouel a oe lidet d'an 12 a viz Gwengolo, e kastell Keryann, gand aon rag ar glao. An Ao. Albert de Mun, député ar vro ha den helavar dreist, desket braz, doujet er Frañs a-bez, a oa e penn ar gouel.

Ar Bleun-Brug e-noa ingalet, war eun dro gand roll ar gouel, diou follenn ma lenned warno reolennou ar gevredigez hag eur pennad-skrid dindan an talbenn : « La Renaissance bretonne ».

Ar pennad-se a zigase da zoñj er stourm greet a-eneb da ene Breiz e-pad an 30 vloaz tremenet. Ar Bleun-Brug a felle dezañ, dre ar prezegennoù, ar journalioù hag an teatr, dihani er Vretoned al lorh euz o bro, ha lakaad ar brezoneg en e blas ar gêr, en iliz, er skol, hag ober euz ar Vretoned eur bobl o houzoud ervad diou yez, peogwir n'eus enebiezh ebet etre ar brezoneg hag ar galleg, evel ma ne da ket ar hatekiz a-eneb d'an « table de multiplication ».

Ar Bleun-Brug a zo o paouez prena bali Keryann hag a zo e zoñj sevel eun teatr. « La fête des Bruyères, sorte de revue solennelle de tout ce qui sera fait pendant l'année, dans le Léon, au point de vue régionaliste, rendra les œuvres plus fortes en les groupant et refera l'âme du pays plus bretonne que jamais. Elle sera la fête de la Tradition, la fête des Bretons qui veulent aller de l'avant sans rien abdiquer de ce qui a fait la gloire de leur race dans le passé. »

E Bleun-Brug 1912 e oe eur honkour evid al lazou-kana, hag evid an dud o kana en o fart : renet e oe ar honkour-ze gand Maurice Duhamel, penn-skrivagner ar « Chansons de France » hag a zastumas 400 ton breizeg ; gand Guillermit, kelenner war ar sonerezh hag ograouer e Sant-Loeiz ; gand an Ao. beleg Guillermit, aozour dastumadennoù tonioù koz ha mignon braz da Bourgault-Ducoudray ; ha gand an Aotrounez beleien Boucher hag Hervé, an daou-mañ beo c'hoaz. Ar zekretourezed a oa an dimezellet a Gervengi hag a

Boisanger. Ne zeuas ar wech-mañ nemed 6 laz-kana, an oll anezo euz a Vro-Leon.

Strollad Sant-Nouga a hoarias « Mouez ar Gwad », pezh-c'hoari diêz a-walh hag a roas tro da zantoud pegen red e oa renka gwelloc'h ar jeu. Setu perag e oe embannet war FEIZ HA BREIZ peseurt teatr a 'felle d'an Ao. Perrot sevel. Eun dra dispar, hag en tu all d'an arhant a helle dastum evid e zevel hag e zerhel e-ratre. Pa lenner roll ar brofourien e komprenere e oa re gaer an huñvre.

D'an 17 a viz Meurzh 1913 e oe an Ao. Perrot anvet da gure e Sant-Tegonneg, dres d'ar mare ma oa Anatol ar Braz o paouez goulenn ma vije sikouret an oberenn dalvouduz-se hag a hellje beza e Bro-Leon ar pezh a oa, e Santez-Anna-Wened, teatr brezoneg an Ao. beleg Job er Bayon.

Pa guitaas Sant-Nouga, goude eur himiad fromuz, e chome Keryann heb teatr ebed, ha diêsoh e oa renka gouel ar Bleun-Brug pell diouz an Ao. Perrot.

Bleun-Brug 1913 a oe dalhet e Kastell-Paol, gand eur program heñvel ouz hini ar bloaveziou a-raog. Paotred Lesneven a hoarias « Engann an Tregont ».

Erwan ar Moal (Dir-na-Dor), — hag a oa krog da skriva e FEIZ HA BREIZ dindan e lesano « Eun Tregeriad », — a houlennas ma vije abadennou labour e-pad gouel ar Bleun-Brug, ha ma vije astennet ar gevredigez war Breiz a-bez.

Edo e hoant war-nez beza sevenet, ha kendalh 1914 a oa o vond da veza dalhet e Gwengamp, pa darzas ar brezel.

(Da genderhel.)

L. Lok.

S		M	O	R	Z	O	L
P	R	A	D			Z	E
E	O	N	E	N	N	A	
R		E		O		H	O
N	E	R	V	U	Z		U
	B	I	L	I		I	T
R	E	O				E	V
	N	U		A	W	E	N

GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 113

A-led.

- I. Epad an hañv e vez kalz dre an heñfhou.
- II. Humbl.
- III. El legestr. — Aneval. — Penn kenta an douar.
- IV. Pa vez meur a hini e vezont kerent. — Pa vez skorn.
- V. War an daol epad ar pred. — Gér latin e penn eur bedenn anavezet.
- VI. E Plouzeniel. — O koumañs troha. — Lost ar billig.
- VII. Ne jom mui nemed unanig bennag.
- VIII. Tud eur gêr vraz euz Breiz.

A-bik.

1. Rezon 'fall (muioh anavezet e Bro-Wened).
2. Pevar droad he deus hag e peb ti e vez kavet.
3. Eno (eul leh ne weler ket). — Euz ar verb ober. — Euz ar verb rei.
4. Dare. — Ar biniou a ro anezañ.
5. Araog hirio. — Euz ar verb rual.
6. Ebarz. — Eleh nann. — Gwiniz.
7. Leski.
8. Kernez.

	1	2	3	4	5	6	7	8
I								
II								
III								
IV								
V								
VI								
VII								
VIII								

TENZOR AR BREZONEG BEO

28. Bitouz.

= unan bihan-bihan : « *Ar re vitouz* » = les tout petits. (St-Segal. Y. Madec, 1942.)

« Eur chapelig paour ha bitouz » (E skeud, p. 10.)

E Skaer e vez distaget *pitouch* evid eur paotrig : « Deut amañ 'ta, *pitouch* fall ».

Troude a laka : pitouz = piteux.

29. Blaouer.

E Melwenn eur blaouer a zo eun diod. (Kerlann, Tregon, 1944.)

30. Blenia (bleina).

= conduire, guider.

« *Ar marh-blein* », ar marh a veze er penn araog pe veze starnet daou pe dri loen-kezeg lost-ha-lost ouz eur harr pe eun alar. Eñ a vleine ar jeo (l'attelage). « *Laka ar marh antier* (kalloh) *e blein, evel just.* »

Al loen a veze etre al limonou (e limon) a veze « *e penn-karr* ». « *Ar gazeg penn-karr* ne jache ket kalz. » Pa veze tri loen starnet lost ha lost, an eil a veze anvet « *ar marh kléür* », pe « *ar marh-kreiz* ». Laka an ebeulez yaouank e kreiz (pe e kléür) aze ne day ket a-bell. » Ar hléür oa an ibil a veze lakeet en eun toull e penn al limonenn hag a zalhe ar starnaj.

31. Bleud.

« *En e vleud e vez o charread* » (charread a blij dezañ) « *Ober e vleud gand...* » (tenna gounid euz...) « *me rafe bleud ganez !* » (me a vrevfe ahanoud !)

« *An neb a ya etouez ar bleud*

« *A dap alao kalz pe nebeud.* »

32. Bleukad.

= Boutad roet gand an dorn sarret. « Eur bleukad a roas d'an nor hag e lammas en ti. » (E skeud..., p. 73.)

33. Boaza.

Traou diêz da zivoaza :

« *Eun intañv hag eun intañvez*

« *Eur penmoh bet war ar panez.* »

34. Bomm.

= *Re a vommoù latin* a zeu gantañ en o zarmon » (frazennou latin).

« *Hennez a zistag bommoù ganeom avad.* » (Il nous en dit de bonnes !)

Ar gêr « *bomm* » pa zinifi « *sillon* » a ro « *bemmen* » el liezder.

35. Boemmi.

Gonideg : charmer. Wardro Kemperle e kaver al lavarenn-mañ : « *Kerzet e-neus war ar yeotenn-voemm* » evid lavared eo bet evel strobinellet.

Strobinellet e Leon a zo « *beza kilhet, kilhet gand ar herel.* »

E Skaer boemmi a dalv hoaz evid moredi : « *Ne gousk ket an hini klañv, nemed boemmi a bennadou.* »

36. Bouch.

E Leon : ebeul pe ebeulez ; e Kerne : pok ; setu a hell rei tro da gemered eun dra evid un dra all.

Epad ar brezel 14, eur paotr yaouank euz kostez Landi a ya d'ar 'foar da Gemper e plas e dad eet d'ar brezel. N'oa ket bet nemeur hoaz e Bro Gerne. Kalz kezeg a oa digaset war ar blasenn 'foar gand merhed, o veza m'oa eet ar wazed d'ar brezel.

Paotr Landi a zistag eun taol war dailher eun ebeul a oa krog eur vaouez en e benn.

- « Pegement ar bouch ? », emezañ.
- « Me 'zo eur vaouez onest », eme ar Gernevodez.
- « O, bezit dineh, eme al Leoniad, paeet e vo deoh ! »
- « Eur bouch, eme ar Gernevodez ne ve ket gwerzet, eur bouch a ve roet. »

37. Boud, boudal.

1. *Boudal* : bourdonner, murmurer (Gonideg).
2. E Gorn-Leon, pa vezer o hoari an dominoioù ha pa ne vez pion ebet da bozi e vez lavaret e vezer boud, e volder « *Boud on !* » — « *Diou wech am-eus boudet.* »

3. Ahano eur ster all anavezet e Leon hag ive e Kerne. Y. ar Gow a lavar : « Beza boud : chom heb dond da vad gand eun dra, daoust da veza poaniet d'her has da benn. » — « *Hogen boud e oe kreiz e zarmon* » (il a perdu le fil de ses idées). « *Chomet eo boud ganin.* » (N'e-neus ket gellet respount netra.)

Lavaret e vez ive e Leon : « *ur hernev boud !* », n'ouzon ket avad perag.

38. Boudouz g.

Eur jidourenn pe pod-houarn (Kerlann Tregon, 1941).

39. Boueta.

1. = rei da zibri : « *Eet eo da voueta an anevaled* araog dond d'e goan ». Lavaret e vez ive *boueta an dornéréz* : lakaad mendoz gwiniz pe gerh da vond en dornéréz ; an hini a ra ar vicher-ze a zo anvet *ar boueter*.

2. = dibri. « Treud eo ar gazeg med gwellaad a ray buan, *boueta mad a ra, mad eo da voueta.* » [F.F. E kembraeg bwyto.]

40. Boujant.

Gér a vrezonég Gwened, hervez Troude ha Gonideg (fringant, alerte, en parlant des personnes). Implijet aliez e Gorre-Leon, distaget « *boujant* » pe hoaz « *boujantig* ». « *Ahanta ! boujantig atao !* » (toujours en bonne santé).

41. Bourjin.

(Ober.) *Bourjinèrèz*. Eun den hag a ra traou ha n'int ket fur awalh. (Gorre-Leon).

Ernault e neus *brichin* : benêt, niais, sot ; folâtre. *Brichina* : faire le benêt. [F.F. e brezonég Gwened *morjin*, (ober) *morjinèrèz* pe *brichin, brichinèrèz*. Eur morjin a ra droug ; eur brichin a ra farsèrèz diod.]

42. Boutad g.

= pennad. « *Eur boutad mad* a zo n'em eus ket e welet » (Skaer). E Skaer e vez lavaret c'hoaz *hallad* (g.) « *Eun hallad mad* a zo diboa ». E Leon e vez lavaret eur pennad, eur *frapad*.

43. Braead.

Labourad gand ar vrae hag ive *strani* e Plouarzel (Mab Arzel 1942).

44. Bramm.

« Evel ar merhed koz, n'int ket evid nah war o bramm » (« Moueziou karet », Ebrel 1945).

45. Brammsahad.

Kaoud beh gand eun tamm labour. (Plouarzel, Mab Arzel 1942).

46. Branket.

Harpet war an divreh pe war an ilinou. « *Branket eo ouz an daol* ». Gwechall e veze stag ouz an douar ar skaon a ree an dro d'an daol-dibri ; evel just ne veze ket re dost d'an daol evid ma vefe gellet tremen èz etre an skaon hag an daol. Ouspenn ar skaon a veze uhelloc'h eged na vez peurvuia bremañ ar hadoriou. Ne veze ket èz dibri nemed hag harpet e vefed ouz an daol — *branket ouz an daol* — pe kemered a rafed ar volenn pe ar skudell etre an daouarn ha sevel neuze sonn war an azez. Da zul en iliz e weler ive gwazed *branket war o hadoriou*.

Marteze e-neus, war bouez nebeud a dra an heveleb ster ar gér « *groñchet* » implijet gand Y. ar Gow : « Eno e oa greet din azeza ouz eun daolig hir a oa, *groñchet* outi moused all en oad din. » Euz ar gér *groñch* = menton.

47. Brao.

« *Chom brao !* » a vez lavaret d'eur bugel evid *chom sioul* (Leon) *chom reiz* (Kerlan, Tregon, 1941).

48. Brein.

« *Brein-pud* » brein-tre, Brein-brein. *Pud* e-neus marteze ar memez orin ha « *putride* » e galleg. — *Brein-pezel* = ble. — E Sant-Vig : *Brein-han* (Peron 1942).

49. Brenn-heskenn.

= Sciure de bois. E galleg e kavom ar gér « *bran* » deuet moarvad euz ar galianeg (langue gauloise) *brennus* = son, partie la plus grossière du son. *Bran de scie* = sciure de bois. E kalz lehiou e Breiz e vez lavaret e galleg « *brin de scie* ».

V. F.



Ar banne alambig

Marjañ, en devez-se, a oa eet da labourad e-kichenig he zi ha laosket Pèr, he 'fried, er gér.

En em gavoud a reas da zond en ti, Cheunig, ar mab yaouanka, dimezet ne oa ket pell. Eun taol mad evid Pèr ! N'e-neus ket aliez an dro da eva eur banne alambig en e di.

Marjañ a zo eul labourérez ; p'ema war eun ervennad sivi, ne zao ket he hein. Istimet eo en tiegeziou med en ti e ra eur vuhez kaled da Bèr : n'eo ket brao ehana nag eva eur banneig amañ hag ahont.

— Sell-ta, Cheunig, va mab, te eo ? Engavet mad out ! Servich deom-ta eur banne alambig araog ma teuo da vamm. Gra buan, va mab kêz, pe ni 'vezo gourdrouzet !

Ha Cheunig kerzoud e traoñ an ti, e-leh ma oa er voger e-giz eun arbelig. Eno Marjañ a refiñe kalz a voutailhou, Eno ez edo an alambig, an « oriflamm »... ha Cheunig gand aon ouz e vamm, a bakas krog er voutailh genta.

Pèr e-noa lakeet dija war an daol ar gwer, gwer bihan ha teo, gand eur foñs braz, bet emichañs evid truilhou e ti ar pilhaouer.

Cheunig lorch ennañ o servich, a skuilhas eur banne founuz d'e dad. Ha prestig goude, a-vad, heb gourhemennou, ar werennad a oa lonket.

Méz, petra 'n em gave ?

Pèr, en em lakeas da basaad ha da dufa war al leur-zi ar veradenn diweza, en eur denna gand poan e alan hag en eur lavared :

« Hemañ, 'vad Cheunig, a zo kreñv ! »

En eun taol-spont, Cheunig a daolas eur zell war ar voutailh ha petra e welas, ar paourkéz paotr, an oriflamm, lintruz war an daol. Sounnet e chomas gand ar spont ! Ma n'oa ket koutammet e dad !

Ne ouezan ket ha Marjañ en em gavas war an taol. Mez ar pez a ouezan eo ne reas van ebet va zad. Cheunig a c'hoarze da houde en eur gonta ne oa ket klañvet e dad gand kemend-se. Sur eo ! Tufet e-poa eun tammig en eur lavared : Hemañ zo kreñv, a-vad, Cheunig ! Mez evelato ne-oa ket bet darbet da Bèr disteuler eur banne ken founuz, servichet gand e vab.

Va zad a oa memez lorch ennañ en eur ziskouez deom pegen kreñv ha pegen den e oa e dad !

Mari Herrou.

KORN AL LIZIRI

Saint-Méen-le-Grand, d'an 8 a viz Gwengolo 1958.

Va Breur kër,

Araog kwitad al leliou-mañ, am-eus an dever plijuz d'ho trugarekâd em ano vanan hag ano va hoarezed evid an derveziou tremenet e Santez Anna Wened. N'on doa ket a vall da weled ar zizun o verrâd. Talvouduz eo bet hag e vezo evidom ar henteliou resevet epad an amzer-ze. Gand al leoriou ho peus kinniget deom e hellom kendalh da gôzeal Brezoneg yah.

Ho trugarekâd a rankan ive evid or Superiorez Jeneral : epad ar retrejou n'he deus ket gellet respont d'ho hetou. Bennoz Doue deoh evid ho pedennou mad, hag evid peb 'tra all.

S^t MARIE DE L'INCARNATION.
(Eul lennezh bet e Skol-Hañv ar Bleun-Brug.)

eul leor nevez

LANGLEIZ

Tristan hag Izold Al Liamm, 1958

850 lur war baper boutin. - 1.200 lur war baper kaer.

Istor vrudet TRISTAN HAG IZOLD, troet e brezoneg ha skeudennet gand *Langleiz* a oa gortozet pell a oa gand'ar Vretoned a vourr o lenn o yez. Deuet eo er-mêz, a-benn ar fin, moulet kaer ha fichtet brao-eston. Ar skeudennou a zo dudiuz evel boaz hag a ro d'al leor eun-dalvoudegez na raio nemed kreski, evel ma c'hoarvezo gand kement tra diwar dorn ampart an arzour braz m'eo *Langleiz*. Koulskoude, n'eo ket ar skeudennou, forz pegen dudiuz e vefent, eo a blij ar muia d'al lennerien, ar skrid vrezonég, ne lavaran ket. Ha diwar-benn ar skrid-se ez eus kalz da lavared. Meuleudi a zo d'ober dreist-oll. Trugarez d'an oberour evid roet deom da lenn, e yez karet or halonou, fromusa istor a garantez bet kontet biskoaz. Trugarez dezan ivez evid beza restaolet da Vreiz eun teñzor a zo bet roet d'ar bed gand ar Vretoned a-wechall. Bennoz Doue, erfin, d'an dud o deus embannet al leor : dezo ivez e tleom ar blijadur on-eus bet o kaoud etre on daouarn eul leor ken brao, plijadur an daoulagad o-deus paret war e baper gwenn-kann, plijadur ar bizied o-deus troet e bajennou flour. Hag ar yez na petra 'ta ? Dibaot eo leoriou *Langleiz*, med ken dibaot-all eo ar skrivagnerien o-deus klasket ober gand eur yez ken dibradet diouz doareou dizudi ar vuhez pemdezieg, gand eur yez hag a luskell al lenner tre beteg broiou misterius e hiraez. N'eo ket diouz ar brezoneg komzet eo e ranker barn yez *Langleiz* : gwall dizaour — ha direiz a-wechou — e vefe kavet neuze, rag n'eo ket blaz ar vuhez pemdezieg eo a fell da *Langleiz* rei da dañva en e leoriou. Eur barz eo bet *Langleiz* da genta, ha barz eo chomet a-hed ar wech. D'an hini en em lez luskella e-giz-se gand he gerioù peuzdianav hag he zroioù-lavar divoaz, yez *Langleiz* a zigor dorioù n'on-eus ket, en ol lavar boutin, an ahwezh anez. Salv ma vezo niveruz ar Vretoned a gavo e TRISTAN HAG IZOLD an dudi na danvaer ket er vuhez. Kement-se n'eo ket evid lavared e vefe peurvad e peb keñver an taol-kaer bet kaset da benn gand *Langleiz*. N'om ket evid gouzañv an doare skriva evel-just, rag eul leor gwenedeg a ranke, d'or meno, beza skrivet e gwenedeg evid ma vije bet lennet gand kenvroiz an oberour. Ha setu eun dra vantruz, ma hell beza lennet ez awalh gand Kerneviz, Leoniz ha Trageriz — en desped d'eur bern gerioù ha d'eundro-lavar anavezet er Morbihan hebken — ne vo ket kavet marteze eur gwenedour evid e lenn, nemed e nef e ad-desket e yez evid heh adkavoud a-dreuz gwiskamant re deo ar skritur Z.H. Trist eo soñjal en dud a Vro Wened : o brasa skrivagnerien euz ar bloaveziou diweza, *Langleiz* ha *Roperzh er Mason* (Doue d'e bardono !) n'o-deus ket teurvezet rei danvez-lenn d'o henvroiz, hag a zo eot da glask lennerien e-mêz euz o horn-bro.

Y. CORMERAIS.

Ar plah goulennet da zimezi



Deh di-we-za em-eus ka-vel Eun tamm la-kez droch ha flao; Ji-bi-
'Barz ar hê-riou oa bet sa-vel Hag e kre-de'kom-ze brao.



di, Ji-bi-da, Mond'barz an dañs da ga-na, Ji-bi-di, Ji-bi-da, Pli-ja-dur din a ra

Diskan :

Jibidi, jibida,
Mond 'barz an dañs da gana,
Jibidi, jibida,
Plijadur din a ra.

6.

« Barz ar hêriou 'vezer eüruz,
— Eno ' kavfeh eur paotr brao —
Hag al labour n'eo ket skuizuz,
Rag labourad vez ket dao.

1.

Deh diweza em-eus kavet
Eun tamm lakez droch ha flao;
'Barz ar hêriou 'oa bet savet
Hag e krede 'komze brao.

7.

« Eno ' teu 'n aour war ar raden,
Bragal ' hellom gê ha drant,
Ha mond bemnoz d'eun abadenn
Sinema p'or befe c'hoant.

2.

« C'hwî, plah, zo koant ha speredeg
« Hag eur pehed braz e ve
« Ho timezi d'eur genaoueg
« 'Vel ma 'z eus kalz en ho pro.

8.

« Setu, plahig koant, ma karfeh
A youl vad dimezi din,
Eüruz ha dibreder 'vefeh
E kêr Bariz sur ganin. »

3.

« Rag ma 'z it da wreg tiegez
« Rankoh poania 'vel eur hi,
« Goro 'r zaout ha teurel evez
« Ouz an traou war-dro ho ti.

9.

Neuze 'm eus respontet dezañ :
« Enor rit din eur mell bern,
Med ar gedon, ' bell, a glevan,
'Liez a ya oll da lern.

4.

« Sul-ouel-bemdez 'rankoh bale
Du-mañ du-hont, 'tousk ar fank
Ha luskellad ar vugale
Ho po diouz an druilh ken stank ;

10.

« N'oun ket c'hoaz eun arziodez
Ha ne gredan ket e vez
Aour da zastum gand ar bodez
'Hed ar ru, dindan ar gwez.


5.

« Meska 'r ribot, ar moh boueta,
Gwel 'd ha vi 've gand ar yar,
Aoza 'r prejou ha, neketa,
Ober kouez ha... me ' oar !

11.

« Kraz eo pillig ar garantez
Pa vez red, zoken e kêr,
Frita laouen ar baourentez
Gwelloh eo din chom er gêr. »

Yeun ar Gow.



Abati nevez Landevenneg